

RECIT TRUEZUS

VAR SUJET EUR C'HRIM BRAS

GRET E PAROS KERMOROC'H

Kals a dud so bet tamalet da vea gret ar c'hrim man a bet er prison e plas Illien ar c'hriminal a neus bet nac'het he grim epad seis vloas anter bet kasset d'ar prison vit laërez a skêi var he vugel, oajet a zaou viz varnugent gant ar skourje pe ar fwet, a kouraj c'hoas da laret rankche he graouadur mervel entre he zaouarn anzaavet he grim en he brison dre se bet c'hoariet dezhan un dro fin, barnet d'ar maro-gant Kour d'assis Sant-Briek en 29 a viz here diveza, grasiel deus ar maro dre urz Presidant ar Republik barnet neuze da labouriou kalet epad he vue.

TON TRIST

Mest an Env ag an Douar Roue ar Firmamant,
Dont a ran d'ho invoki gant eur galon ardant,
Da rei eur moment amzer sklerijen d'am speret,
Vit ma c'hellin discleria dirak ar Vretoaet,

Eur c'hrim deus an horrupla gret gant dorn eur barbar,
A neus laket kals a dud en anken en glac'har,
Rag epad seiz vla anter e so bet meur a zen.
Tamalet deus ar c'hrim man, bars e plas Illien,

Sebill oa eun den yaouank, a so bet er prison,
Var dro eur seiz pe eiz mis plas ar meuntrer pweltron,
Ag he goas a so noter oa ive tamalet
Da vea gret ar c'hrim man, ag a so trist meurbet,

Pebeus glac'har ag anken, e oa se d'an noter.
Goude diweret he vreg kemeret vit muntre,
Koll he reputation hini pevar bugel,
Met kavet eo ar muntre, dre c'hras an Eternel,

Deus a zaou viz varnugent n'oa eur bugel oajet,
Ag e skoe varnean gant skourje pe gant fwet,
A kouraj c'hoas da laret demeus wez huel,
Rankje entre he zaouarn he graouadur mervel,

Neuse oa bet denoaset, ar muntre Illien.
Rênet da brison Gwengamp kerkent gant archerien
A da brison Sant-Briek, ac'hane oa kasset,
Eno eo bet Bretonet, ar guden dibwellet,

Un all oa gant Illien bars ar memeus prison
A neus klasket an tu, ar kavet ar feson
D'ober d'Illien anzao dionthan he dorfet,
An den man vit an dra se a so bet akitet,

Heman vellen d'Illien nevoa bet lavaret
Me a vo e gwirione gant ar c'hour akitet
Ia ! dre ma meus lavaret, va c'hred ar wirione,
A te mar kerez laret, vi ket barnet ive.

Met kavet eo ar muntrer, dre c'hras an Eternel,

Klevit breman Bretonet, discleria pen da ben,
Eur c'hrim gret e Kermoroc'h, dre nerz dorn Illien,
Ag ouspen c'hout a glevo, bars en brezonnek skler,
Penaos so bet gouveet eo bet he ar muntrer,

Er c'hwec'h varnugent viz du vit rei skler da entent,
Bars er blavez trivac'h kant c'hwezek pevar ugent.
En de se Itron Monfort, oa vont da dy he zad,
Pa deus kollet he bue tre daouarn an ingrat,

Illien saillias varn'hi, vel eur c'hi arajet,
Pini neller areti he araj milliget.
Divar an hent n'eul lannek, nevoa bet e zreinet,
A kercent gant he foularr, siouas n'oa e mouget,

Itron Monfort a devoa, pad un neubeut amzer
Difenned mad he bue deus griffou ar muntrer,
Ar muntrer muioc'h nerzuz a drese an Itron,
Deus bet eur maro gwell gri, tre daouarn ar pweltron,

An arc'hant a so tentus da gals bars er bed man,
Dre e sujet kommeter krimou ar vrassa
A dre sujet an arc'hant, hellomp oll da gredi,
Deus ranket Itron Monfort soufr ar verzerenti,

Ar c'hriminal d'an noter ranke anter-kant liour,
Sonjal re gant an Itron, kavet arc'hant pe aour,
Vel se he nije gallet dont neuze da bea,
Ar pez ranke da bried ar verzerez paour man ;

Tromplet oa bet bretonnet, ar muntrer Illien,
N'oa kavet gant an Itron nemet daou skwet epken,
Met deus a greis he yec'het ag he frosperite
Neus gret da Itron Monfort, kredit koll he bue,

Illien pad he vue, sioas neus bet prestet,
He ziou skouarn da zellaou prins bras an droug speret,
Dre se neus bet baleet, dre hent ar fallente
O laerez pe o lac'ha kouls en noz vel en de,

Illien vanke james da vont goude e goan
Var an hentchou vit laërez koulz bras evel bian,
Mouchouerou goll, pe c'hodel a laëre alies,
Tremen ugent n'oa roet d'he blac'h pe d'he vates,

Pa laëre mouchouerou, lod ar merc'het neuze,
Rede buan var e lerc'h sonjal kaout anezhe,
Nem gavet n'eul leac'h distro laëre d'hē ho arc'hant,
Cethu ase finesse Illien an tirant,

Reproduction interdite.

A le mar kerez laret, vi ket barnet ive.

E neur gredi an den se, outhan n'oa anzavet,
E nevoa bet gret eur c'hrim, drouble kals he speret,
Rag sonjal a re dezhan kouls en noz vel en de,
Gwelet gant he zaoulagad he victim en bue,

Vel ma nevoa anzavet, he grim bars er prison,
An oll ebars er c'hontre oa zeder ho c'halon,
Ag Illien a grede ne vije ket barnet,
Neur laret ar wirione var sujet he torfet,

Dre se goude d'ar justis, n'oa ive diskleriet,
E nevoa bet ar galon da ober au torfet,
O sonjal kavet arc'hant evit pea e c'hle
Noa gret da Itron Monfort siouas koll he bue,

Ebars en fin mis here neuze so bet galvet
Da vont da gaër Sant-Briek testou en ne enep
Ag er memeus testini eno neus bet gret skler,
Laret oa c'hoas eull laër bras ouspen ma oa muntrer,

He vreg ive d'ar justis, a deus bet lavaret,
E oa un tad dinatur, a kolerus meurbet,
Na mont james da gousket ebars en he wele,
Araog ma vijé un heur pe diou deus ar beure,

Vel ma oa bet an testou gant ar c'hour selaouet,
A gret mat reflexion var sujet an torfet,
En presans eur bobl enorm a tud deus a bep bro,
Ar c'hour o deus bet barnet Illien d'ar maro.

Vel ma nevoa bet klevet he gondanation,
E lavaras nevoa keu a glahar n'he galon,
Rag birviken ne nije bet anzavet he grim,
Anez ma oa bet tromplet gant neubeut potret fin,

D'ar c'hour a gassation, he affer oa kasset,
Eno vel e Sant-Briek d'ar maro oa barnet,
Presidant ar Republik dre ma neus ar pouvoar
Neus astennet he vue d'Illien ar barbar,

A dre urz ar Presidant goude eo bet barnet
Da veva pad he vue touez ar griminalet,
Neus ket heuillet an hent mad, breman renko mervel,
Pell deus greg a bugale a pell deus Breiz-Yzel.

Breman e neur finissa, me o ped kristenien
Ne heuilomp ket ar vue neuz heuillet Illien,
Greomp vad vel ma c'helfomp an eil vit eguile.
Vit gonit hor c'hurunen ed an eternite,

LE BRUN.

Diskour Pipi d'he vignonet

dre ma neus bet eur sonj tromplet

Ton charmant

Ma mije bet eur speret, ag ive an talant.
Me mije gret un diskours, ebars en heur bresant.
Diskleriet en Breiz-Ysel va bue tremenet
Vit servijout da gentel da lod va mignonet,

Mar deuan ma genvroiz, nep feson do choki
Me o ped a wir galon da zont dam eskuzi
C'houllan ket bars em diskour, méprisa eur c'hristen.
Met mar c'heullit ma rojou, kouls a me po anken,

Un dra gwel vezus eo din, pa sonjan koulsgoude
Kelen furoc'h evit on var reglen ho bue,
Met ar proverb mignonet lavar dem evellen,
Allas sotoc'h vit an den, avichou er c'helen,

A nep a zalc'h en he dy, kals deus a lorc'hachou,
A mon ive alies d'an hosteliriou,
A pa nefe madou bras, deüo en ber amzer,
Kazi sur da nem lakat en stad a vizer,

Ar vout rond deus ar bed man, so leun ingrati
A mil malheur eo d'an den, ne gômbat ket onthi.
Sioas pechou danjerus dre oll a so stignet,
A me gant ma oll fian, dre se so bet tromplet,

Gwech all me ïe e gwetur da foar a da varc'hat
Gwisket evel un otrou, dre oan paysant mad,
Ken buan ag an avel me ïe dre an hentchou.
Ag an arc'hant o trouzal ebars em godellou.

Me ïe alies ive neuze dar marc'hajou
Da gaerc'het gwin, gwin ardant, kafe a likeuriou
Kals a hosteleriou a mije da dremen,
En'he oll me ziskenne, da c'hleipi va lachen,

Pa vijen gwelet erru kredit va mignonet,
An hostiz an hostizez, ne vijent ket kousket,
Ho daou teuent assables evit va zaludi

Ia ! En digare puri nem gave eur gomer,
Ag en digare klask laez neuze ter pe peder,
Bempde e vije ganthi eur bern komerezet,
O eva gwin a kafe e debri viou fritet

Oll e dije diganthe da eva da zebri,
A samet vel mulezet araog mont deus an ty,
Ober a rent goab onthi, nem rei d'heñ eur brizen,
Ma dije t'ha diganthe, bleud, kig pe anduillen,

Ed a rankenn da brena araog fin miz ebrel,
Se a garze din buan, va yalc'h a va godel,
En daou benn ar c'houlaouen pa ve krog mad an tan,
Ve devet en ber amzer, ne chom ket pell en poan,

Pa neur gavenn bars er gaër, deus marc'hat pe deus foar
A leun va zibieren kredit ep lakat mar,
Va greg vije n'he gwele e neur voren doren,
Dre ma dije bet ive kleuzet re ar weren,

Evit rei festou a lorc'h, me a preste arc'hant
Ag a bede an otrou kouls ag ar payzant,
Rag da dava ar frikou kredit ranken pedi,
Nep a preste din arc'hant, pe gaout ho fachiri,

Alies laken va zaol, da zonet da blega,
Gant mejou délisius, lituriou ar fina,
Evit gwelet andrase, va oll amezeien,
Gredient ket vijen dic'hle, na didrousken va c'heñn

Nep vije bet o tebri, ho lod deus ar frikou
A c'hwerze goab c'hoas dime neur vont dre an hentchou,
Ia ! e neur return d'ar gaër lare n'eil d'eguile,
Vijent un den gwel diot, ober festou var c'hle,

Pad ma oann me bet dalc'het da rei eur seurt festou,
Me a vije saluded gant kals reveransou,
E neur c'houlen diganne kelou deus va yec'het,
Ma mije da dremen, kafe a likeuriou
Kals a hosteleriou a mije da dremen,
En'he oll me ziskenne, da c'hleipi va lachen,

chan

La ne en me ziskenne, da e mear va iachen,

Fa vije gwelet erru kredit va mignonet,
An hostiz an hostizez, ne vijent ket kousket,
Ho daou teuent assables evit va zaludi
Neur laret din antreet, ebars en ty Pipi,

Da gemer eur banac'h rhom, pe eur bana'ch kafe,
Kals e vo tommoch, dec'hu gwel fresk eo ar beure,
Ma mije bet eur banac'h, me roe daou pe dri
Da hostiz d'an hostizes da nep vije en ty

Araog ma c'henn deus ar gaer ma forn a vije tomm
Ne deue ket da iena gant kafe du a rhom,
Derc'hel a renn da eva epad korden an de,
Ken a chomen stok va c'horf e kornik a toufle,

Va greg ive kouls a me devoa kavet an tu,
Da eva gwin, gwin ardant, kognak a kafe du,
A gwerza re ep gout din, kals traou deus ar menach
Vit pasturi mad he c'horff, a kondui lorc'hach

vijent un den gwel diot, ober festou var e me,

Pad ma oann me bet dalc'het da rei eur seurt festou,
Me a vije saluded gant kals reveransou,
E neur c'houlen digannhe kelou deus va yec'het,
Met pa dro rod ar fortun, kenavo d'ar vignonet,

Nep so bet deus va sikour da zebri va danve,
Nint ket bet deus va sikour, goude da bea gle,
Allas va brassa mignon, so deut d'am dilezel,
Pa meus lipet va gweren, gwelc'het net va skudel,

Breman eo zerret ouzin dorr gaer ar garante,
Mépriset gant va c'herent a gant tud va c'hontre,
A breman va mignonet bars en fin va bue,
Asables gant parourente, me so vaga kerze

Near finisa va diskour me o ped mignonet
Ne heuillet ket ar rojou pere a meus me gret,
Pe m'ar deuet d'en ober c'hellet don da gredi
Teufet ive un devez d'am park me da beuri

LE BRUN

(Reproduction interdite)

Konsolation Pipi goude bea debret he vadou so deut da nem gontanti

Neus ket ebars er bedman eur blanten divoanet,
Ag a ve he holl vrakou er memeus hueldet,
Neus ket ive eur famil ebars en eur c'hontre,
Da gaout kement a vadou, aneill vel eguile

Ha ! Petra dalv din sonjal, he amzer dremenet,
Gwel eo din nem gonsoli entre ma vin er bed,
Ne c'houllan nemet yec'het tre ma vin e bue
Dalv ket din a besketa, pon varlerc'h ar mare,

Pa sonjan pinvika den, eo a so bars er bed,
Eo an hini vev kontant er stad ma ve rentet,
E neur glask va zamm bara gant eur galon laouën,
Me vo kals evrussoch vit lod gant ho moyen,

Rag lod gand eur bern madou, ne nem gontantont ket,
Ho speret e pep amzer ve meurbet jagrinet
Klask dastum an oll vadou e neur gaos voutez koat,
E teuont da nem briva a wed ag a zillat,

Ag a rese kouls a me un devez erruo,
Zerro ive evel don ho daou zorn e gollo
Ho c'horf evel va hini, en douar a vreino,
Ag ho madou er bedman var o lerc'h a chomo,

Nep a deus talvoudegaes pa neve hirr vue,
Ve reketet he varo evit kaout he zanve
Alies e ve disput tre an iritourien
Vit gout p'hini anezhe devo brassa loden.

Nep so dre uzulierez er bed destum madou
A vo taolet en ifern goude fin he zeiou
Birviken n'hello antren bars er palez a joa,
Dre ma vo bet re ingrat e kever he neza,

Met me a meus partajet, dezhe va holl danve,
Dre se e meus esperans goude fin va bue,
Lavaro din va Salver ia gant eur wez huel
Mont neuze da jouissa deus ar gloar Eternel

LE BRUN

(Reproduction interdite)